

442

An Electionou,

(328, suite)

Chanson neverz, imprimet e bultin Mignon al Labourer,
Eilvet bloavez, n° 8. Eost 1834.
Var goulen an A. Duchatellier, President ar Société a Emulation
a Guimper.

Var an ton gallec : j'ons un curé patriote.

Eurus e zo ar citoyen
A zo hanvet Electour,
Pa en deveus an oll voyen
Da zouguen d'e vro sicour !
E hano zo affichet
Diouc'h ty-ger hac er porchet....
Electour, Electour,
D'ar c'habal bezit trec'hour. (bis)

Me voar piou a vero hanvet, (329)
A lavar goen da Fanch;
Mes ne fell get din ven blamet;
Neus forç, emedi en manch....
Alies e ve quelet
Pignet var quein e videt.
Electour, ...

Mar deu da rancontri ar mē,
Yard-Champêtr, pe Archerien,
Pe ar sous-Prefet, o quelet
Diouc'h tu dizolo o fenn :
Salud d'ê'h, hor mignon ger,
Hon Electour Yan Cosquer.
Electour, ...

Deiz an assemble, ma velfec'h

Yan Cosquer savet abret,
Assur, estonet e vefec'h
D'er quelet, ger caer quisquet :
Un toc bras, ur jupen glas
Rochet quenn ha bragou bras.
Electour, ...

(330)

Da brema e vraguez, sellit
Daou vouton bras ha brillant,
Hac endro de doc caer, quelet
Ur gordonen gaer arc'hant.
Janitierou bras brodet
Diouz e c'hêtrou strubillet.
Electour, ...

Yoennic, e val yaouanga,
A brepar e varc'h dezan,
Ul loenic demeus ar c'hoanta
A voe quelet er vro-mañ,
Yan Cosquer a voa en trein,
Hac a saill prim var e quein.
Electour, ...

Brema e ve d'ê'h, Bretonet,
Dont da velet va fautr goas,
En e gorn deo ar brid troet,

(331)

En hini deiz ur penn-bas ;
E gantenn, peziou daou scoët
En e c'hodol dastumet .
Electour, ...

An Electour, ar citoyen,
A gavan eurvus meurbet,
Pa ellont, dre bep suant moyen,
... er o dever bepret .
An Electour vo d'e vro
An arbitrer pa garo .
Electour, ...

En a rêgl oll, pa fell dezân,
A hanv ar re en heuillo,
O c'huntumu, mar plich gantân,
Ha prak gar o fellayo .
Dreist oll ma n'en deo qet bet
E interest respectet .
Electour, ...

(332) Eurvus un Electour ive
En deus ur verc'h fur ha coant,
Rac ar bautret yaouanq neuze
Da blijout dei o deus c'hoant .
E val hac e verc'h neuze
A vrill el leurion neve .
Electour, ...

D'un Electour n'ous den hanval,
Rac en eo a deu da choas
Ar c'honseiller municipal,
Hac e zeo en a rêgl c'hoas
Oll dispignou ar gommun
Bep mis, bep deiz, bep sizun .
Electour, ...

En eo a deu da decita
E pelec'h en em rento
Labourerie, choaset gantân
Da quempen hentchou ar vro ;

Ar gorveennou neuze
Zo fixet gantân ive .
Electour, ...

(333) Un Electour zo eurvus bras,
Hac an hini ell beza,
Rac etrezo ec'h ellont choas
Gant an evestet brassa
O officierien ractal
En gardou national .
Electour, ...

Peguer bras e zeo d'ar gouelioù
Guelet hon oll yaouanqis
Oc'h orni bez o fusillon
Gant boqedou bras esqis !
Sellit o feçon vaillant
Da c'houel caer ar Sacramant !
Electour, ...

Biscoas hon tud cos na veljont
Netra assur evellen ;
An eil d'equile leveront,
O tont da hija o fenn ;
(334) Ma teufe Yan-Saurz d'hor bro,
Var e fri en derozo .
Electour, ...

Elec'h ur forc'h, elec'h ur bal,
E ve presentet dezân
Bayonetes, sabren ractal
Da doulla e gôf breman :
Sonch o defe da vigen
Ouz Celtiqet tor e ber .
Electour, ...

Lenmit buez sant Guenole,
Den vertuzus ha santel ;
Ne zeus qet en Locquenole
E bar nac ac'han da bel .
Guechall da estranjourien

444

E laqas terri o fenn .
Electour, ...

Pa zibarqas an Dannoanet
En hor brô , pell amzer zo,
E croas milli - guern , voent pladet (335)
Ha qempennet tro var dro .
Eno e voent sur , ma feiz ,
Frottet mad gant pautret Breiz .
Electour, ...

Ar Vretonet - se voa neuze
Ar gardou national ,
Ha ministret Doue ive
En o fenn vije ractal ;
Rac Breizis , e peb amzer ,
O deus caret o brô quér .
Electour, ...

M'o deufe bigen ar Saurzon
Na soudarded ar Russi
C'hoant dont varnomp , en nep tison ,
O defe un troatad fri .
Regetomp qentoc'h bepret
Ma vezimp oll mignonet .
Electour, ...

Eurus an Electour certen ,
Dre m'en deveus ar pouvoar (336)
Da henvel e officerien ,
En deveus ivez ar gloar
Da henvel an Deputet ,
Conseillerien , d'ar prefet .
Electour, ...

Ja , eurus , rac en a ra ,
Dre an dud demeus e choas ,
Donet ive da decida
Ar brezel pe ar peoc'h c'hoas ,
Ha qement tra a zepant
Demeus ar gouarnamant .
Electour, ...

Mes , dreist oll , er c'havàn eurus
Da gavout ur verc'hic coant ,
Leun a furnes hac a vertus
Ouspen ma edeus arc'hant .
Hi a choaser ordinal
En ilis erit qestal .
Electour, ...

Eurus ivez , rac en a zo (337)
Atao er fenn eus an dol
Deiz ar pardon , en eur frico ,
Guyê evel ur rossignol .
An oll neuze er salud ,
Ha pa gomz e chommer mud .
Electour, ...

Mes maleur , ha teir guech maleur ,
Dezan , ma na ramplis qet
E zever evel ma dleer ,
Da voti ma n'en deo bet !
Rac neuze ec'h eller dont
Deus e gundu goulen cont .
Electour, ...

Maleur dezan , ma nevoar qet
Er c'hass-se lenn ha scrifa ,
Rac certen e vezo tromplet
Hep na vouio en nep tra ,
Rac e vultin ell neuze (338)
Grêt enep d'e volonte .
Electour, ...

Maleur , ha c'hoas maleur dezan ,
Mar bez , vit ur banne guin ,
Surprenet e vot digantan ,
Ha goapêt dindan e vin !
Gant ar bis vo disquezet
Hac evel buquel trêtet .
Electour, ...

fin.

A. L. M. L.

(Vol. IV , p. 328 - 338.)
27 str. numérotées .